

(320)

*Cantic*  
En enor d'an Itron Varia ar Vur,  
Patronez Montroulez.

Var ton : Reine des Cieux, ô divine Marie.

Guerc'hez Vari, Patronez Montroulezio,  
Ni deu hirio, leun a zevotion,  
D'oc'h enori amâ bars en hoc'h ilis :  
Hor selaouit, ni ho ped, hon Itron. bis.

Santez Mari, mam d'hon Zalver adorabl,  
Plijet ganêc'h selaou hor pedennou,  
Ha deurezit beza bepret favorabl  
D'ho pugele, Rouanez an êvou. bis.

Mam bur, dinam, ô Guerc'hes oll galloudus !  
Qer douç, qer mad evit ho pugele !  
Teulit varnomp ho sellou carantezus ;  
Grit ma vimp dign ouzoc'h hed hor bue. bis.

(321)

Güir mellezour demeus ar justiq parfet,  
O Mam <sup>sa</sup> Jesus ! vessel spirituel,  
Grit, ni ho ped, ma vezimp oll peurgarguet  
<sup>Eus a zezir al lez celestial.</sup>  
~~O Guerc'hes saer ! demeus ho craq bepret.~~ bis

Tenzor divin, tour David, tour olifant,  
O mam dener, ha sclêr querelaouen,  
Grit ma vezimp ouz ar pec'het triumphant,  
Ha ma vezimp equis güir gristenien. bis

Ty a fuzez, pales aour, arc'h aliang,  
Dor eus an ên, remed d'an afflijet,  
Ni a rent dêc'h enor en ho temeurang ;  
Hon delivrit demeus a bep pec'het. bis

O Rouanez an Oeles, ar Brophetet,

Patriarchet, merzerien, Ebestel,  
 Cōvessoret, Guerc'hezet, sent, sentezet,  
 Hor protejtit, ô Rouanez santel. bis.

A lein an ên, Guerc'hes gloriüs Vari,  
 Teulit eur sell var rouantelez Franç;  
 Grit ma rëno ar güür besc'h christey enni:  
 Ennoc'h, Mari, e mäs hon esperanç. bis

(322)

Gloar da Vari ra verzo bepret rentet;  
 Hi eo hor Mam, hac hor güür advocades;  
 Ha canomp oll a galon hac a speret;  
 Gloar da Vari, Patronnez Montroulez! bis.

8 Guengolo, 1840.

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 320-322.)  
 9 str. numérotées.